

[Au 31 verso, seulement titre, écrit à l'encre par Penguern : Otro Kneve.]

(f° 31 v°)

Otro Kneve .

An otro Kneve en deveus gret  
Ar pes ne raje dichentil e bed,

Nag an deveus gret eur lestr neve  
Ewit has da brezant dar Roue .

Laket e mab enan da vont gati,  
Ag e vilien al mer da idi .

E vab enan a lavare  
Dan Otrou Kneve ag an de se :

— Va zadik paour ma nem Gheret  
Gant ar lestr neve nem c'hasset ket

Gant ar lestr neve nem c'hasset ket  
Gant va breudeur all me vo lac'het .

Otrou Kneve a respontas  
De vab enan pa en c'hlevas :

— Bea droug gant an eb a garo  
Gant ar lestr neve c'houi a iello .

En douar Sant Jan a vo karghet  
En douar neve en e lezjet .

An otro a Kneve a lavare  
Gant e lestr neve pa partie :

(f° 32 v°)

Otrou Doue petra a rin  
An douar Sant Jan pa kiniadin

Kui e vo vor c'halon ma ne rann  
Pa Kolin ar goel a tour Sant Jan

En chonjal em douç Mari pole  
Aunes zo klac'haret va goude.

E vreur Kadet a lavare  
D an otron Kneves ag an de ce :

— Diles res te Mari pole  
Pe breman souden kol da vue ?

An otron Kneve a lavare  
De vreur Kadet ag an de ce :

— en an' Doue nem lac'het ked  
Va zollet en tu var eur garek.

Ne voa ked e c'hir peur lavaret  
E kreis ar mor donn ne voa sklapet.

Tri de a teir nosfes e he bed  
en kreis ar mor donn var eur garek

Et kallout na dibi nag eva  
na cessi eur moment da waella,

Chonjal en e Douç <sup>(1)</sup> Mari Pole  
Onez a voa c'hlac'haret e goude.

Eur listr e zond a zouar Sant Jan  
A remerk anean ker buan

Alg ar mest a lestr divar ar pont  
A deuas de remerk dre renkonte.

— Me vel eur mantollot fortuniet  
E kreis ar mor Donn var eur garek

(f° 33 v°)

E kreis ar mor Donn var eur garek  
Red e dem tachout mont de vellet.

Otron Guerneve a c'houlenne  
Deus an dud a lestr po sallude :

(1). Le z de Zouç, écrit en surcharge sur un d.

— tuot chentil dime leveret  
Deus a fe sort douer e deuet ?

An dud a lestr a respontas  
Dan otrou Kneve pe klevas :

— Deus an douar Sant Jan a deuomp  
Var an douar neve e c'heomp.

An otrou Kneve a lavare  
Na dan dud a lestr an de ce :

— Dud chentil, emean, ma nem c'heret  
Grit eur plizadur em andret :

Ma renter en douar 5<sup>te</sup> Jan fete  
Me plo dec'h o feach douar neve ?

An dud a lestr a respontas  
Dan otrou Kneve pa en klevas :

— Deus ebars ar lestr ag ambarket  
Ni on lakai en douar assuret.

Otrou Kerneve a vonjoure  
En ti ar pole kos fra erve :

(f° 34 v°)

— Dibonjour a joa bars an ti man  
Mari ar polar felec'h e man

Ar Poleo kos a dal e dan  
A teuas da respont ken bihan :

— e man duze en e goelle  
eur mab bihan en e goste

eur mab bihan en e goste  
a tamal dan otrou Kneve

De eureuzi ne deuis ked  
Rag klevet on deus e he beuet.

36

Otrou Keneve vel ma klevas  
 Gant ar vins dan ec'h prompt a pignas  
 Gant ar vins dan ec'h prompt a pignas  
 Mari ar poleo a salludas.

— seven deus o kouelle mari  
 Ma c'heomb da Sant Jan da eureugi.

ma vomd dimeet ag eureuget  
 Bars ma arvus ma breur Kadet

Dimeet int bed ag eureuget  
 Nag ar bughel legitimet

Nag ar bughel legitimet  
 Bars na he arriet ar c'hadet.

→

[riev amp. 32, 33, 34 rector.]